

## Ichtyonymie bretonne - Buhez Alan-Gwenog Berr



**Alan-Gwenog Berr**  
(1913-1974), *Poltrud gand*  
*Chkorn, eur c'hamarad*  
*euz an Havr nevez.*

**A**r re n'o-deus ket bet an eurvad d'anavezoud Alan-Gwenog Berr (1913-1974) n'eo ket êz rei da gompren dezo perag eo ken stard d'ar re a zo bet tost dezañ kavoud ar gerioù reiz da gonta e zoare. Digor a oa e spered, farser a oa ive, med ouspenn e oa eun den hag a blijed dezañ deski mond don er studi ha beza siriuz en e enklaskou.

### **Mil buhez warn-ugent Lan**

E Lamballe a oa ganet Lan, er bloavezh 1913. E dad, anvet Alain eveltañ, a oa ginidig euz Kervreac'h, e Gwaien. Pesketour a oa hemañ, ha kalvez a vor ive. Evel e dad hag e vreudeur e farde bigi. Red oa bet dezañ koulskoude kuitaad e vro hinidig abalamour d'ar vizer a rene er C'hab e penn kenta an ugentved kantved, dre ma ne zeue ket mui a zardin d'ar bae. Deut a oa da veza karrer e kompagnunez hent-houarn ar Stad e ker Lamballe. Mamm Lan, Catherine Arhan, euz Plouhineg, a oa merh eur pesketour-beziner euz Sant Dreyer. D'an oad a bevarzeg vloa e teskas ar vicher ebenist en Havr-Nevez e-barz an « École Pratique

d'industrie ». Goude e labouras evel treser en industri betek 1941. Eur wech en em gavas sur euz e vara en em lakeas da studia e skol an Arzou-Kaer, ha war-lerh e skol-noz an « École Primaire Supérieure », en Havr-Nevez. Kement-mañ a roas c'hoant dezañ mond d'ober skol d'ar re all, ar pezh a reas goude ar brezel. Mobilizet a oa bet kerkent ha ma oa deklaret ar brezel, ha demobilizet ken prim all. Neuze e labouras evid an « Défense Passive », o veza m'en-oa tapet, bepred en Havr-Nevez, eun diplom infirmier-ambulañsier. Er bloavezhioù 1941-42 e kavas labour e Pariz, hag e-keit-se e lakeas e ano en « École Pratique des Hautes Études » er Sorbonne, e-leh ma heulias kenteliou war ar c'heltieg. Goude ma oa deut endro da Vreiz, e teuas da veza sekretour Yann Fouéré e Roazon evid *Ar Brezoneg er skol*, a ree war-dro kenteliou brezoneg er skolioù hag el liseou. D'ar c'houlz-se e teskas eur bern traou diwar ar re a a stourme evid ar brezoneg, en eur glask mired darempredou gant ar re a galon eeun a bep tu. A-drugarez d'e labour e hellas skigna kazetennou kuz, loja tud klask warno ha farda paperioù faoz p'e-noa desket kentoh ar vicher treser. Dekoret eo bet e fin ar brezel gand ar

groaz « Combattants volontaires de la Résistance ». Kement ha derhel gand e studi e lakeas e ano e Skol-Veur Roazon, hag eno e tapas er bloavez 1943 eun Diplom war ar Studiou Keltieg.

Goude al Liberasion e labouras evel « Inspecteur de presse », ha goude treser er « Fonderies & Ateliers de Quimperlé » beteg miz here 1947. Neuze eo e krogas gand e vicher nevez en deskadurez eil derez. E-pad ugent vloa e veajas koulz e Breiz hag e kornog ar Frañs evel kelenner war ar zaverez mekanik. Hag eñ kelenner e Landerne, e tigouezas dezañ gweled levrennou kenta *Toponymie nautique* embannet e 1953 gand ar « Service hydrographique de la Marine ». André Guilcher, euz an Enez Sun, kelenner douarionez e ker Nancy, a lakeas anezañ d'ober anaoudegez gand tud ar Marin a ree wardro an afer. An ingénieur général Dyèvre, hag e felle dezañ nevesaad kartennou ar mor, a lakeas anezañ da veza karget a enklaskou e 1953. Setu ma heulias Lan eur staj evid ar studierien – n'e-noa nemed daou-ugent vloa d'ar c'houlz-se ! – e-barz « Station biologique » Rosko gand biolojisted ar mor, Claude Lévi, Gilbert Deroux ha Louis Cabioc'h, hemañ eur brezoneger dispar.

leh e-noa dastumet. Etre 1965 ha 1973 eh embann peder levrenn all diwar aochou hanternoz Breiz-Izel, gand ouspenn 4 500 ano-leh all. Diwar an niver braz a anoiou-leh-se a teuas dezañ ar c'hoant da skriva eun dezenn. Eun den digor evel ma oa, eh anaveze eur bern tud. An Aotrou Bachellery, kelenner en « École Pratique des Hautes Études » Pariz ha Fleuriot, kelenner e Skol-Veur Roazon a rene e labour. Gand o sikour, hag ive gand hini tud all, e teuas da veza anvet karget a enklaskou er CNRS e 1966, er rann « Linguistique Générale ». Setu achu e vicher kelenner.

E 1948 e-noa lennet eur pennad « Toponymie nautique des côtes bretonnes » embannet en gand ar Chaloni Falc'hun, kelenner war ar c'heltieg en amzer-ze e Skol-Veur Roazon, ha goude e Brest. Ar pennad-se eo a roas lañs d'e enklaskou hag a oa eur skwer evitañ. Hag eñ o klask bepred gouzoud hirroh e tapas Lan e 1967 an Diplom Uhella Studiou Keltieg e Skol-Veur Vrest. E-barz laboratouer « Phonétique expérimentale », krouet er bloavez 1969, e oa enskrivet, hag ive en « UER des Sciences de la matière et de la mer » a oan rener warni.




*O tiskuiza e fin ar zizun  
asamblez gand an Itron ...  
ha peadra da lenn  
(Penn ar Bed!)*

### **Euz an enklaskou beteg an dezenn**

Embann a reas Lan diou levrenn er bloaveziou 1960 ha 1961, enno 2 500 ano-leh ar mor aochou kreisteiz Breiz-Izel. Setu ma welas Lan e veze kavet kalz geriou diwar al loened hag ar plant en anoiou-

D'ar mare-ze, ne oa ken daou benn-klasker diwar an enklaskou-ze, Jouvin ha Le Danois, a veze aliez o chom e Rosko. Felloud a re dezo mired eun ano ofisiel hepken evit peb seurt pesk, e-plas ar bern anoiou diforh euz pep leh. Nemed nahed o-deus ar besketourien ober ze, a oa evel just drez ar c'hontrol euz ar peza felle da Lan ober... Plijadur e-neze o konta : « Pa oan seiz vloa, pa vezem ouz




**Gadus luscus** (bremañ *Trisopterus luscus*), ar pesk brudet a gaver war holo Ichthyonymie bretonne. Treset gand an enklasket e-unan ...

taol, e veze anvet « un tacaud » beurleg ; Rumon Naour, ma eontr, mestr-pesketour, e-neus kontet din e veze anvet ar beurleg moullig e Douarnenez, ha takard e Lotudi ». Da gen pell ha 1934 eo e krog e gardedou enklask kenta diwar anioiu pesked, savet gand sikour e dad-kaer Per Gouzien hag e gindirvi Lanig ha Joz Naour, pesketourien e Gwaien !

Da êsaad e labour enklasker e-noa savet Lan, ebenist a vicher, boestou stal da ziskouez d'an dud stumm ar c'hregin, al loened hag ar bezin seh a oa o klask kaoud o anioiu... Daou c'hant tresadenn greet gantañ e tiskoueze dezo ive, rag n'eo ket eved netra e-noa heuliet kenteliou skol an Arzou-Kaer ! Gand ar benviachou-mañ da heul anezañ, leun e 2CV ganto, e teuas Lan da redeg bro en dro d'an aochou evel ma ree marhadourien ar c'hantvejou tremenet. Med n'e-noa netra da werza, ne glaske nemed deski langaj ar besketourien. Abaoe amzer e vugaleaj e-mesk an dud-se ouie penaoz selaou ouz an dud all. C'hoant e-noa deski kement a ouient. Ne oa ket eul labour gwall êz e-touez ar besketourien, rag evito kement a vev er mor a zo pesked. Me ma unan a zo bet atao estonet o klevet labourerien lennou pesked Rosko oh envel legristi ha grilled « pesked », hag ive boued an istr (heb komz euz ar grogenn). A-drugarez d'e vinviou ha d'ar 600 a dud e-neus komzet ganto eo deuet Lan da renabi 540 loen mor. Beteg al loen anvet e galleg « loche noire » Morlogoten zu, *Raniceps raninus* : anavezet e oa gand ar besketourien med ne oa ket gand an dud skiantel araog ma oa deuet an Amoco Cadiz d'an douar e 1978.

Kement-mañ a ra korv an dezenn e-neus skrivet diwar anioiu pesked Breiz-Izel, ha n'int ket toud pesked, pell ahano !

Red e oa da Lan renka anioiu brezoneg al loened mor e mod biolojised al loened mor. Setu ma teuas Lan da gomz gand ar spesialisted e Skol-Veur Breiz-Izel, Albert Lucas, Jean-Yves Monnat, Jean-Paul Guyomarc'h – brezonegerien mad an daou zen mañ – ha me ma-unan. Neuze eo e krogas Lan da dastonad e-pad pell ha gand beh.... On labourni a oa kavoud e studiadennou Linné peseurt ano



*Asamblez gand François Le Corre, pilot e porz-mor Rosko.*

skiantel o-doa ar spesiou, petra oa o flas e-barz, diwar an anoiou roet dezo gand ar besketerourien. Loened evel ar spoñjed a vez roet ano traou da zebri dezo, evel farz pe bara... gand ano o liou da heul. *Noctilucae*, a luh en dour, a zo tan noz. Stumm diavêz al loen a vez goapeet awechou, evel ar penn kreol, ar meill ruz, pe hoaz ar penn kourn.... Diwar e stumm diavêz pe diwar ar c'harakter a roer dezañ eo e vez roet e ano d'al loen. Farsal a ra an enklasker abalamour d'an anoiou druz a-walh a glev a-wechou. Lod a vez roet o ano d'ar pesked muioh evid da re all ... Tud a iliz, eskibien, beleien o faoiou kamm, machigoded, seurezed ... Merhed ive a vez er jeu, lod tomm o zantimant, lod all dous o fas med kaled o c'halon : « evel ar raskou, a veze lavared bronnou bihan merhed euzouto, med a roge treid ha pennou daoulin ar vugale, o vond war kerreg an aochou ». Ar valtouterien gand o abid liou hag o boned a vez kavet ive e-mesk an anoiou. Ar re-mañ a lakee Lan da hoarzin abalamour d'eur

den ouspenn deg vloaz o klask dond a-benn euz labour e vuhez. Ne glev Lan o komz euz netra all er Skol-Veur evid euz an dra-ze, setu ma savas ar ger goapaer « mathèse ». E-leh lavared « je prépare ma thèse » e lavare « je prépare ma mathèse ». Pa houlenne Lan « Quand passes-tu ta mathèse ? » e klev aliezh ar respont-mañ : « J'attends qu'untel ait passé sa mathèse ».

Achui e dezenn a oa eul labour skuizuz spontuz evitañ. E-keit ha ma helle derhel gand e labour e lavare e oa « e-touez an dud ivurusa a zo war ar bed ». Divennet eo bet e dezenn d'an 9 a viz meurzh 1974 gand e wreg, teir zizun goude m'eo marvet, d'an oad a dri-ugent vloa. Enori a renker Skol-Veur-Breiz-Izel da veza lakaet divenn an dezenn-mañ, en eur zal vraz leun a vartoloded, aasketourien, a dud euz an Arme, euz tud a Iliz hag a tud euz ar Skol-Veur ....



*Lan o vousec'hoarzin, asamblez gand daou besketaer...  
heb na vefe dizoñjet e gravatenn a vro-Skos ...*

preñv hir hir, fin fin, ha ne hell morse koulskoude sikour da ober re vihan : beh am-eus bet o kavoud, benn ar fin, e oa diouz *Lineus longissimus* a oa kaoz, a roer kement ha farsal an ano a pich maltouter dezañ. Ha lorh e Lan o veza kavet eul loen ouspenn, dreist-oll dre ma oa bet anavezet gand mab bihan eur maltouter !

War-lerh ar bloavezh 1968 en em lakeas tud ar Skol-Veur ha re ar CNRS da gaoud c'hoant da zivenn peb a dezenn. Achui e oa ar mare ma tremene eun

### **Eun den a vrud vad**

An den digor ma oa Lan a domme outañ kement hini a dostee outañ. Eñ ive e-neze doujañs ouz an dud a galon vad. Klask a ree kompren peb tra, setu m'en em zile êz e kement sosiete a oa, setu n'e-nije ket displijet dezañ al lesano silienn (*Conger conger*).

Abred en e vuhez e-neus darempredet Lan René-

Yves Creston, an hini a zavas ar strollad anvet *Seiz Breur*. An arzour-mañ a oa eun den a vil vicher, a zave meubl kaer hag a oa bet o naviga war ar « Pourquoi Pas ? ». Degemeret a oa bet er CNRS war-lerh al Liberasion evel etnolog. Sur a heller beza eo bet an den-mañ eur skwer evid Lan. Langleiz e-neus kemeret penn ar *Seiz Breur* da heul, kelenner e skol an Arzou Kaer e Roazon, liver ha skulter war goad, a oa tost ive da galon Lan, an artizan koad.

Plijoud a ree Lan da vad da strollad Plozeved, da lavared eo Henri le Moal, Rektor Akademiez Roazon, Per Trepos ha Per-Jakez Helias, an daou-mañ oh ober war-dro ar brezoneg e Radio Quimerc'h hag izili euz Ar Falz, a vode tud a galon vad a zivenne ar brezoneg (Armand Keravel, Charlez ar Gall...). Eñ ha n'ee ket d'an iliz a zaremprede eskibien, an Aotronez Barbu ha Favé, eskibien Kemper hag ive meneh Abati Landevenneg. Ouz e daol e helle eun den en em gavoud gand an amiral Georgelin, Gwenaël Bolloré, an Itron de Valera, merh Prezidant Republik Iwerzon.

Kared a ree Lan ar zonerez, setu ma kasas unan euz e vibien da heulia kenteliou Christian Lardé, kelenner e « Conservatoire de Musique » Pariz. Digouezoud a ree d'ar zonerien a dremene er PAC (hirio anvet Quartz) beza pedet war an tomm en e di, e-leh ma hellent en em gavoud asamblez gand eur paour-kêz maleuruz bennag kavet war vord ar boulevard Gambetta.

E-pad lañs a enor ar Skol-Veur e 1968, e oa bet pedet eun den gouizieg brudet er bed oll kement ha diskouez e oa troet ar studiou war-zu ar mor. Leslie Cooper a oa ano an den-ze, euz an oll-vrudet *Plymouth Marine Laboratory*. Dond a reas da zoñj da hemañ komz e kembraeg dirag an dud sabatuet, en o mesk meur a ofiser euz an arme. Ne oa nemed Lan a helle kompren ar pennad-kaoz-se, distaget war an ton braz, med ive leun a fent. Setu ma komzas d'e dro, en eur zistaga eun nebeud geriou er memez yez dirag an dud sabatuet. Diskouez a ree Lan sklêr e oa troet gand ar broiou keltieg en eur wiska eur gravatenn evel ma ree an oll gelennerien d'ar mare-ze. Liviou Bro-Skos a veze bepred war ar gravatenn, gand meur a dardan, hervez an deiziou, ar pezh a ziskoueze e-noa mignoned feal en tu all da Vor-Breiz.

Tad a oa Lan da zaou vab, pephini anezo o tiskouez eun tu euz e fersonelez. An hini henna, Hervé, e-neus kendalhet, asamblez gand e wreg, d'ober skol, ha d'o heul daou euz o zri bugale ; an eil mab, Youenn-Gwenog, soner klasel, a zeuas buan

da veza unan euz gwella sonerien azginivelez ar zonerez keltieg.

### **O komz euz gwrizioù**

E pennad kloza e dezenn, skrivet en abati Landevenneg, en em houlenne Lan doare « den diwrizienn an amzer-vremañ, pell-pell euz e dad, galeour ar bloavezioù 1920, stag ouz ar bezin hag ar c'herreg »... Kement-mañ a lakee anezañ da zoñjal en eurvad a hell eun den kaoud war ar bed. Daoust hag e hell eur wezenn beva heb he gwrizioù ? Gwelom eta : pa lak ar martolod o tond d'ar porz e droad war an douar kaled, e komz eveljust euz e wrizioù. Diouz eun tu all e wel ervad n'o-deus gwrizienn ebed al loened mor a anavez (nemed plant al lehidennou), hag e-neus roet anoiou drol dezo. Kement o-devez ezom e kavont en dour endro dezo. Kalz e-neus mabden hoaz da zeski diwar skwer ar bed diwrizienn-ze. Gouezet e-neus Lan ar zilienn en em zila hag en em ober ouz ar bed-se - evel eur pesk en dour.

**Mickael Glemac'heg**

Kelenner koz, UBO,  
Océanographie biologique